

LENNADURIOÙ KENTAÑ

LEVR 3



TOTOC'H

Y
JON

Mary Vaughan Jones

AN HERE

**LENNADURIOÙ KENTAÑ
LEVR 3**

TOTOC'H

gant

Mary Vaughan Jones

Skeudennoù gant
Rowena Wyn Jones

Brezhoneg gant
Padrig an Habask ha Martial Menard

AN HERE
Kergleuz
29480 AR RELEG KERHUON

LEVRAOUEG BREIZH

Moulet er Gelveneg
Moullerezh Bretagne Sud
Diskleriet hervez lezenn
Genver 1992


Nnn ar Mouller : 76 A 295

Moulet ez eus bet 700
skouerenn eus al levr-mañ

© CYMDEITHAS LYFRAU CEREDIGION 1970 — Embannadur kembraek
© AN HERE 1986 — Embannadur brezhonek kentañ — 700 skouerenn
© AN HERE 1992 — Eil embannadur brezhonek — 700 skouerenn

I.S.B.N. : 2.86843.028.7

Embannet e brezhoneg gant aotre hegarat Cymdeithas
Lyfrau Ceredigion, anezho embannerien kembraek ar
rummad levrioù-mañ.




Setu Totoc'h
ar pemoc'h bihan




ha setu ti Dotoc'h




Un ti en deus Totoc'h
ar pemoc'h bihan.
Met kozh-kozh eo e di.



Kozh-kozh eo an doenn.
Toull eo an doenn
ha riv en deus Totoc'h
diouzh an noz.



Kozh-kozh eo ar voger.
Toull eo ar voger
ha riv en deus Totoc'h
diouzh an noz.




Kozh-kozh eo an nor.
Toull eo an nor
ha riv en deus Totoc'h
diouzh an noz.




Kousket a ra Totoc'h
war ar plouz.
Met yen-yen eo ar plouz,
ha riv en deus Totoc'h
diouzh an noz.




Debriñ a ra Totoc'h
en ur sailh.
Met kozh-kozh
eo ar sailh.
Hag un toull
zo er sailh.




Aet on skuizh o vevañ
en un ti kozh.




Aet on skuizh o vevañ
en un ti kozh.
Dav eo din kaout
un ti nevez.



Aet on skuizh o kousket
war ar plouz.
Dav eo din kaout
ur gwele.




Aet on skuizh o tebriñ
en ur sailh.
Dav eo din debriñ
ouzh taol.



Dav eo din kaout
un ti nevez.
Hag un doenn
hag ur prenestr
war ma zi.



Dav eo din kaout
ur gador-vrec'h,
un daol
hag ur gwele
em zi nevez.




Dav eo din kaout
un ti nevez.
Yen eo ma zi kozh.
Yen-yen eo ma zi kozh.



Setu ti nevez
Totoc'h.



Setu ti nevez
Totoc'h.
Un doenn,
ur prenestr
hag un nor zo war e di.



Ur gador-vrec'h nevez,
un daol nevez
hag ur gwele nevez
zo en e di.
Eürus-tre eo Totoc'h.



Setu ar mell tarv kozh.




Ha setu ti ar mell tarv kozh.



Un ti en deus
ar mell tarv kozh.
Met kozh-kozh
eo e di.



Kozh-kozh eo an doenn.
Toull eo an doenn
ha riv en deus
ar mell tarv kozh
diouzh an noz.



Kozh-kozh eo ar voger.
Toull eo ar voger
ha riv en deus
ar mell tarv kozh
diouzh an noz.




Kozh-kozh eo an nor.
Toull eo an nor
ha riv en deus
ar mell tarv kozh
diouzh an noz.



Kousket a ra ar mell tarv
kozh war ar plouz.
Met yen-yen eo ar plouz
ha riv en deus ar mell tarv
kozh diouzh an noz.



Debriñ a ra ar mell tarv
kozh en ur sailh.
Met kozh-kozh eo ar sailh.
Hag un toull zo er sailh.




Aet on skuizh
o vevañ
en un ti kozh.
Dav eo din kaout
un ti nevez



Aet on skuizh
o kousket
war ar plouz.
Aet on skuizh
o tebriñ en ur sailh.



dao dao dao
ouzh an nor.



Demat Totoc'h.
Demat tarv kozh.
Dav eo dit distreiñ
d'an ti kozh Totoc'h.
Dav eo din kaout
an ti-mañ.



Dav eo din kaout
ar gador-vrec'h-mañ.
Dav eo din kaout
an daol-mañ.
Dav eo din kaout
ar gwele-mañ.




Met re vihan
eo an ti-mañ
evidout tarv kozh.

Re izel eo an doenn evidout.
Re vihan eo ar gador-vrec'h
evidout.
Re izel eo an daol evidout.
Re vihan eo ar gwele evidout.



Gouelañ ha gouelañ a ra
ar mell tarv kozh.
Aet on skuizh
o vevañ en un ti kozh.
Aet on skuizh
o kousket war ar plouz.
Aet on skuizh
o tebriñ en ur sailh.




Dav eo dit kaout
un ti nevez tarv kozh.
Dav eo dit kaout
un doenn uhel war da di.
Dav eo dit kaout
ur gador-vrec'h vras ez ti.
Dav eo dit kaout
un daol vras hag ur gwele bras.




Setu ar mell tarv kozh.
Riv en deus ar mell tarv kozh
diouzh an noz.
Dav eo d'ar mell tarv kozh
kaout un ti nevez.




Setu ti nevez
ar mell tarv kozh.



Setu ti nevez
ar mell tarv kozh
ha Totoc'h.



Izel eo an doenn
evit Totoc'h,
hag uhel eo an doenn
evit ar mell tarv kozh.



Ur prenestr bihan
zo evit Totoc'h,
hag ur prenestr bras
evit ar mell tarv kozh.



Ur gador-vrec'h vihan zo evit
Totoc'h,
hag ur gador-vrec'h vras
evit ar mell tarv kozh.



Un daol vihan
zo evit Totoc'h,
hag un daol vras
evit ar mell tarv kozh.



Ur gwele bihan-bihan
 zo evit Totoc'h
 hag ur gwele bras-bras
 evit ar mell tarv kozh.
 Eürus-tre eo Totoc'h
 hag ar mell tarv kozh
 en o zi nevez.

Gerioù ha troioù-lavar nevez an trede levr

1 : Totoc'h	16 : --
pemoc'h	17 : eürus-tre
ha	18 : mell
Dotoc'h	tarv
2 : en deus	19 : --
kozh	20 : --
e	21 : --
di	22 : --
eo	23 : --
3 : doenn	24 : --
toull	25 : --
diouzh	26 : --
a ra	27 : --
4 : voger	28 : dit
5 : --	distreiñ
6 : kousket	mañ
plouz	29 : --
yen	30 : re
7 : debriñ	evidout
sailh	izel
8 : Aet on skuizh	31 : gouelañ
vevañ	32 : uhel
9 : dav	da
din	vras
kaout	33 : d'an
nevez	34 : --
10 : --	35 : --
11 : taol	36 : --
12 : ma	37 : --
13 : daol	38 : --
14 : --	39 : --
15 : --	40 : --

Gerioù ha troioù-lavar nevez an trede levr
renket diouzh urzh al lizherenneg

a ra
da
d'an
dav
debriñ
di
din
diouzh
distreiñ
dit
doenn
e
en deus
eo
eürus-tre
evidout
ez
gouelañ
ha
izel

kaout
kousket
kozh
ma
mañ
mell
nevez
pemoc'h
plouz
re
sailh
skuizh on aet
taol/daol
tarv
Totoc'h/Dotoc'h
toull
uhel
voger
vras
yen



AN HERE

Embannadurioù
evit ar re yaouank
Kergleuz

29480 AR RELEG KERHUON